


PEDEN EURED DA ZANTEZ ANNA

VAR DON : *Patronez dous ar Folgoat.*

Diskan.

*O mamm goz, Santez Anna,
Deut omp'harz ho skeuden,
Hor c'halonou leun a joa,
D'ober d'oc'h eur beden :
Lakit dindan ho skoazel
An daou bried neve ;
Grit d'ezo, betek mervel,
Miret lezen Doue !*



1.

Gânt gras ar briedelez
A deuo d'o zikour,
E talc'hint d'ar zantelez
E kreiz ar bed treitour...
Ar c'henta plas en o zi
A vezo da Jesus,
An eil a vo da Vari
O mamm garantezus.

2.

Jesus karet da genta
Gant daou bried kristen
Varno'lez hep marc'hata
E vennoz da zisken ;
Ha tan ar guir garantez
A deuz ho c'halonou
Var gresk a yelo bemdez
Betek dor an nenvou.

3.

Evel Jezuz zo skoazel
An Iliz ken tener,
Evel an Iliz santel
A zo leun a zousder,
Ar goaz a vezo nerzus,
Aketus d'ar labour,
Ar vaouez dous ha sentus,
Prest ato d'e zikour.

4.

Pa vo laouenedigez
Dindan an oabl seder,
Ha pa vo tristidigez
Dindan ar gwall amzer,
Kalonou an daou bried
A lammo a-unan
Vit kreski o eurusted
Ha bihanât o foan.

5.

Eun deiz, deiz a levenez,
 'Vo'guelet eur bugel
 O c'hoarzin ouz an clez
 Stouet var e gavel...
 Hag astennet ar vue,
 Sevenet o mennoz,
 An tad, ar vamm, da Zoue
 A gaso mil bennoz.

6.

Bugale fur ha sentus.
 Bugale savet mat,
 Bugale karantezus
 Ha mat da labourat
 'A vo'vit ar priejou
 O joa var an douar
 Ha da viken en nenvou
 O c'hurunen a c'hloar.

7.

Breman, kerzit heb anken !
 A dreus ar bed garo,
 Santez Anna, ho tifen
 Betek pred ar maro...
 Ha pa vo red kimiada,
 An eil diouz egile
 C'houi'lavaro hep gouela :
 « Kenavo e Doue. »

Imprimatur :

Quimper, le 22 Juillet 1925.

A. COGNEAU, V. g.

Kemper, Moullerez ru an Dudchentil.